

n°3 - Miz C'hwevrer

KAIDEK

KAZETENN LISE DIWAN KARAEZ

TAOLENN


AR MALVENNOÙ KLOZ	P.2
KELOÙ SONEREZH	P.3
ESPERANTO	P.4
C'HOARIOÙ VIDEO	P.7
REKIPE	P.8
ITRON IRMA	P.9
BANDENN TRESET	P.10
KELOÙ MAT	P.10
C'HOARIOÙ	P.11
AR C'HWIZZ	P.12



Ar malvennoù kloz, ur ganaouenn skrivet gant Marine Lavigne



Rekipe ar maki gant Onenn ha Coline



**- Esperanteg -
Ludwik Lejzer
Zamenhof, ur
medisin
etrevroadelour**

**Keloù nevez diwar
an Erer Kozh hag
an Hellfest**



Ar malvennoù kloz



Marine Lavigne, kanerezh ha skrivagnerez ar strollad
sonerezh SEIM

Ganet d'ar 6 a viz Du 1997 e Douarnenez, bet e skolaj Diwan Kemper ha heuliet kentelioù kan-ha-diskan gant Louise Ebrel eno, Marine Lavigne a zo ur ganerez kan-ha-diskan ha kanerez a vicher, 26 vloaz ganti.

Sur a-walc'h e anavezoc'h anezhi, pe evit he c'hanaouenn evit ar Redadeg e 2018 Betek an Trec'h (gant ar strollad Penn Salsardin). Pe evit he c'hanaouenn Fulenn tremenet en Eurovision e 2022 (gant ar strollad Alvan hag Ahez).

Met aze 'vo komzet eus Malvennoù kloz, embannet e fin 2023 gant ar strollad SEIM hag ar pozioù skrivet gant Marine. Pal ar ganaouenn a oa komz eus ur sav boent a-vremañ gant ur son hengounel. Er ganaouenn ez eus kaoz eus an diaestaerioù da annezidi Breizh da gavout

ul lojeiz nepell diouzh o labour hag diouzh o familh, abalamour da eiltier an douristed. Pouezus e oa eviti hag evit Antonin Volson (taboulinoù) ha Jonathan Dour (violoñs). Rannet eo ar ganaouenn e div lodenn : en hini gentañ e kemer plas Marine ur vourc'hizez perc'henn war lojeizoù e pep lec'h e Breizh. En eil lodenn e kemer Marine plas ur plac'h eus ar vro o kontañ ar vuhez er vro. Dedennus eo tem ar ganaouenn ha plijus de glevet . Kit da sellet war youtube !!!

Onenn VC



Pajenn 2



Keloù sonerezh

**Embannet eo bet roll strolladoù
an Erer Kozh !**

Goude rekord ar bloaz tremenet gant 346 000 arvester.ez, en deus embannet an Erer Kozh ar strolladoù a vo e Kerampuilh d'an 11, 12, 13 ha 14 a viz Gouere.

Liesseurt-kenañ eo programadur ar fest ar bloaz -mañ gant strolladoù evel Gossip, Sam Smith, PLK (Yaou 11/07), Sting, PJ Harvey, Yungblud (Gwener 12/07), Grands Corps Malade, Rival Sons, Caravan Palace (Sadorn 13/07) pe c'hoazh Simple Minds, Kings Of Leon hag Eddy De Pretto (Lun 14/07).

Hervez mammennoù 'zo e vefe ar strollad Cypress Hill raktreset ivez d'ar Sadorn.

Spi hon eus e vo nebeutoc'h a glav eget ar bloaz tremenet !

**Embannet eo bet roll strolladoù
an Hellfest ivez !**


178 strollad a zo 'vont da seniñ etre ar 27 hag an 30 a viz Even e Klison. Liesseurt-kenañ eo ar strolladoù ar bloaz-mañ, hag an holl stiloù metal zo diskouezet : heavy, thrash, black, death, punk, stoner, neo... Bez ez eus strolladoù dic'hortoz ivez, evel Shaka Ponk, evit unan eus o abadennoù diwezhañ, Foo Fighters, pe c'hoazh The Prodigy.

E-touez ar 178 strollad ez eus 101 strollad ha n'int deuet gwech ebet er fest. Met bez ez eus memes tra strolladoù boaziet evel Megadeth, Cradle Of Filth pe Madball, a zo deuet 7 gwech abaoe ar fest kentañ e 2006.

An holl dikiji 4 devezh zo gwerzhet dija.




Pajenn 3



Esperanteg

Ludwik Zamenhof, ur medisin etrevroadelour



Ludwik Zamenhof, alias Dr.
Esperanto

Evit darn vrasañ ac’hanoc’h, klevet ho peus komz eus an Esperanteg un nebeud gwechoù marteze, met n’ouzoc’h ket re petra eo. An darn vrasañ eus an amzer e vez termenet an Esperanteg evel ur yezh etrebroadel, ma n’eo ket AR yezh etrebroadel. Koulskoude, pa ‘voe embannet gant Zamenhof e 1887 yezhadur ar yezh-mañ, komzet hiriv en ur 100 bro bennak, ne ouezer ket c’hoazh e vo komzet c’hoazh eus ar yezh-se

tregont vloaz goude. Setu krogomp bremañ da sellout pishoc’h ouzh an den emañ o paouez kinnig : Ludwik Lejzer Zamenhof, un oftalmologour ganet er pezh ‘oa anvet a-raok Impalaerezh Rusia.

Ludwik Lejzer Zamenhof, a zo ur yuzev poloniat ganet e 1859 e kêr vihan Białystok, ur gêr bolonek hiriv lec’hiet e-kichen an harz bielorusian, hag a-raok lec’hiet er gouarnamant Grodno e Rusia.

Bez e oa eno ul liesseurtes vras a yezhoù hag a orinoù, Poloned, Alamaned, Russianed, Lituanianed, hag all, hag all...

Tad Zamenhof a oa rusian, ha kelenner alamaneg ha galleg, hag e vamm a oa yuzevez. Setu desavet eo en un endro liesyezhek, en e familh hag en e gêr ivez. Buan-tre e teuas da vezañ Zamenhof dedennet gant ar yezhoù met gant ur preder don diwar mont en-dro ar gevredigezh ivez. Soñjal a ra dezhañ eo an holl gudennoù eskemm etre ar poblañsoù disheñvel ha c’hellfe bezañ diskoulmet dre reiñ dezho ur yezh neutrel. Ret eo gouzout eo kreñv ar gwask er mare-se. Alies en e

d’ar mare-se eo kroget gantañ da ijinañ e raktres yezh krouet, neutrel hag hep raksoñj ebet. E-pad e 18vet deiz-ha-bloaz, diskouez a ra evit ar wech kentañ d’e gamaladed eus al lise e yezh krouet kentañ : al Lingwe Universala, dindan stumm ur varzhoneg. A-wechoù e vez komzet eus “pre-Esperanteg” evit ar yezh-mañ. Met memes ma’z eus ur bern a boentoù boutin gant an Esperanteg dija, chom a ra c’hoazh pell dioutañ. N’hon eus nemet un nebeud roadennoù diwar-benn al Lingwe Universala, setu da skouer ar 4 gwerz gentañ :

*Malamikete de las nacjes, / Enebiezh ar broioù,
Kadó, kadó, jam temp’ está ; / Kouez, kouez, an amzer eo;
La tot’ homoze in familje / Mab Den en ur familh,
Konunigare so debá. / En deus d’en em vodañ.*

vugaleaj eo Zamenhof test eus senennoù feuls etre poblañsoù e gêr.

Hollad an traoù-se a ra en em zedennfe Zamenhof gant ar yezhoù estren. Komz a ra rusianeg ha yiddisheg gant e familh, deskiñ a ra poloneg er straed, galleg, alamaneg ha saozneg er skol. Dezho e c’hellomp ouzhpennañ ar yezhoù “klasel” evel gresianeg, latin hag an hebraeg Barrek-tre eo e rusianeg, e yezh vamm, setu soñjal a ra un amzer bezañ skrivagner er yezh-mañ. E 1874, pa oa 15 vloaz, dilojañ a ra Zamenhof gant e dud da Varsovia. Eno ez a e lise, ha

*Banniel an Esperanteg, hag a oa er
penn kentañ hini klub Esperanto
Boulogn-war-vor*



E 1879, e dad, ha ne gompren ket kement-se an interest da grouiñ yezhoù, a gas anezhañ da studial ar medisinerezh da Voskov, evit ma c'hellfe Zamenhof kaout ur gwir vicher. Met n'eo ket se hag a harzas anezhañ da vezañ dedennet gant ar yezhoù. Da 20 vloaz, skrivañ a reas ur yezhadur yiddisheg. An amzer-se a glot gant ar pogrom kentañ ivez : etre 1881 ha 1884, Rusia 'zo distabil dre fazi ur cheñchamant renad. Echiñ a ra ar politikerezh liberal gant penn kentañ ren Alexandre III, ar 14 a viz Meurzh 1881, ha kregiñ a ra ur politikerezh sokial mirour hag enep-yuzev.

Ar yuzevien a zo tamallet evit an holl gudennoù a zo er vro, dreist-holl an distabilder-se, memes ma 'z int ar re gentañ o c'houzañv

anezhañ. Choazet 'vez gant ar gouarnamant politikerezh an teir zrederenn: un drederenn eus ar yuzevien o deus da cheñch relijion, un all he deus da dec'hout kuit hag an trede he deus da vervel. Ar bloaz-se, muioc'h eget 100 pogrom a darzhas er Rouantelezh rusian : ar yuzevien a zo laeret, gwallet ha drouklazhet. Ha tout-se gant asant ar gouarnamant. Goude-se, gwirioù ar yuzevien a voe strishaet hag ur bern a voe skarzhet eus ar vro.

Pajenn 5

An degouezh-mañ a lakaas Zamenhof da guitaat Moskov da vont da Varsovia, eno 'vo kendalc'het e studioù gantañ. Memes ma Zamenhof ne oa ket o desellout anezhañ evel yuzev met evel Rusian a-raok tout, an darvoudoù-se a degasas anezhañ da gemer perzh en emsav sionistour.

E-pad ar mare-se, sevel a reas en e-unan un emsav sionistour e Varsovia engouestlet kalz, met er maez eus al lezenn ivez : ar riskloù a zo bras-divent. Un nebeud amzer goude, kuitaat a reas an emsav : soñjal a ra n'eo ket posupl distreiñ da Balestina ha ne zegas ar vroadelouriezh netra vat, o rannañ an dud e plas bodañ anezho. Dont a ra da vezañ e-kerzh ar bloavezhioù un etrebroad-



Ar Pogrom e Rusia, 1881

delour meur, betek en em zispartiañ penn-da-benn diouzh an emsav, gant piv en doa dalc'het un nebeud liammoù.

Met deomp en-dro da zistro Zamenhof da Varsovia. Pa zistroas e sonjas kenderc'hel gant e raktres yezh etrevroadel. Koulskoude, a-raok ma vefe bet kuit, e dad en doa rediet anezhañ chom hep kenderc'hel gant e basion e-kerzh e studioù. Tad Zamenhof ne oa ket un den gwall lemm e spered. Setu p'emañ hor c'hrouer yezhoù yaouank o soñjal eo bet

renket, prenet ha lakaet a-gostez, e skridoù e Lingwe Universala, e vamm a lavaras dezhañ eo bet devet gantañ e holl labour.

Memes m'eo trist gant ar c'helou fall-mañ, tremen a ra buhan da draoù all : mennet, stagañ a ra en-dro gant e labour. Adober a ra tro pe dro e raktres kentañ gant ar pezh en deus soñj ha profitañ a ra evit gwellaat anezhañ. Ur raktres klokoc'h, met gant un anv hag a chom tost d'an hini kentañ, a zo neuze ganet : al Lingvo Universala. Krouet en deus Zamenhof ar pezh a vo goude anvet an Esperanto. Gwir eo ez eus diforc'hioù etre hini 1881 hag an hini anavezet hiriv an deiz, met an diaz a zo amañ. E 1887, Zamenhof a zimezas. Memes ma c'hell seblantout danevelliged (anecdoticque), e gwirionez e vo pouezus-tre e buhez ar paotr yaouank, hag a zo bremañ 28 vloaz.




Alexandre III

E wreg, Klara Silbernik, a zo yuzev eveltañ, hag anavezet en doa just a-walc'h anezhi en emsav sionistour pa oa studier. Leun a virvilh hag a youl, sikour a ra he gwaz en e raktres personel. He zad, e penn un uzin ha gant leun a arc'hant, a sikour hag a souten Zamenhof en e raktres etrevroadel. Nemet daou vloaz goude e vefe bet echuet e yezh, Zamenhof a zeuas a-benn da embann dornlevrioù eus ar yezh e rusian. Buan a-walc'h, e voe versionoù all embannet, en o zouez anezho unan e galleg. Anvet eo gantañ e grouadur : "Yezh etrebroadel", gant an anv "Doktoro

Esperanto", an Doktor hag a spi, evit derc'hel e vrud medisin. An anv-se a vo goude an hini hag a roio e anv d'ar yezh e-unan : Esperanto. Ur wech an esperanteg embannet e kreskas e ferzh, ha dont a zeuio da vezañ ar yezh krouet anavezetañ eus ar bed.

Keloù c'hoarioù video

Pajenn 6



Outer Wild a zo ur c'hoari krouet e miz Mae 2019 gant un embregerezh anvet Mobius Digital .


Er c'hoari emañ un treobl karget da studiañ war ur sevenadurezh all hag a zo diank met bep 22 vunutenn, ar steredenn eus da sistem heolel a darzh hag e adkrogez eus zero, evel ma vefe echu ar c'hoari, met eüruzamant e talc'hez soñj eus ar perzh zo tremenet. Kalon evit ar veaj etreplanedenn-se.

Eneour D.


NOTABLE PEOPLE

Topi Tjukanov en deus krouet ur gartenn gant anv eus an dud vrudetañ eus all lec'h m'emaoc'h evel Jules Verne e Bro-C'hall ha Yann Tiersen evit Breizh. Deuit da welet, farsus-kenañ eo !

Eneour D.



Rekipe #3 : Maki



Ezhomm ho peus : (evit 4 den)

Evit ober riz :

- 400 g riz sushi
- 60 ml gwinegr riz
- Sezam

Evit ar gwarnisadur :

- 1 avokad
- 1,5 gonkombrezenn
- 200g eog
- Follennoù nori (8 tamm-pe-damm)
- (Evit ar gwarnisadur, lakit ar pezh ho peus c'hoant ha tennit ar pezh na blij ket deoc'h !)

1 : Naetit ar riz meur a wech betek ma vefe treuzwelus an dour. Goude-se laoskit ar riz en dour 30 munutenn.

2 :

En ur gastelodenn lakit ar riz hag an dour da virviñ gant ur golo.

Ur wech emañ an dour o virviñ diskennit an tan laoskit ar riz da boazhañ e pad 15 munutenn ha da repoziñ 15 munutenn ivez.

3 :

Meskañ, ar gwinegr riz ar sezam hag ar riz hep flastrañ anezhañ

4 :

Lakaat tout-se da yenaat war ur blatel


Ha setu, deuet out a-benn da brientiñ riz evit ar maki !!

5 :





Hag evit echuin ar maki ret eo dit troc'hañ e laonnenoù tout an aozennoù, staliit ar follenn nori war un tapis maki pe war selofan. Lakit ar riz war c'horre stallit al laonnenoù pesked, avokad, kokombrezenn, ha ruilhit an tapis pe ar selofan ha setu, prest eo !!!


Prest eo !

Onenn & Coline



Pajenn 7





Itron Irma

Planedennoù



1. MAOUT

Pegen moutik!! Ur c'hazh bihan emaut o vont da welet er straed.



2. TARV

Ar garantez 'zo un dra vrav, n'eo ket 'ta? Te zo o vont da dañva an dra-se, ma n'out ket aseksel. Mod all, chokolad emaut o vont da zebrñ, mat eo ivez, ar chokolad.



3. GEVELLED

Un den mat out va bihanik ! Sikour a ri un den kozh da dreuziñ an hent pe da zougen e zafar.



4. KRANK

E gwir, aze, n'az peus ket chañs. An alarm 'zo o vont da seniñ e-pad da strinkadenn. Chañs vat dit.



5. LEON

E-pad ar miz, da vignonez 'zo o vont d'ober ur souezhadenn dit, met grik ebet, ur sekred eo...



6. GWERC'H

Penn kentañ ar binvidigezh eo evidout ! Un dant emaut o vont da goll, al logodennig a zeuio da reiñ dit ur pezh moneiz neuze.



7. MENTEL

E-kreiz ar goañv emaomp, ha se 'dalv ar yenijenn, ar glav, hag (emichañs) ec'h ivez! Ha tout an dra-se ne c'hell ket c'hoarvezout hep tapout ur c'hleñved bennak eveljust !



8. KRUG

Plijout a ra dit lenn ? Emichañs ya. Te vo bannet en un istor ha bevañ ri 'barzh bed al levr emaut o paouez lenn !



9. GWAREGER

Kae maez eus da di un tammig ! Dizoloiñ a ri ul lec'h brav nebell diouzh da lec'h bevañ.



10. GAVR

Chom aketus ha kousk muioc'h mar plij! Te zo vont da gousket e-pad ar c'hentelioù !



11. SKUILHER-DOUR


Digarez... Ar glav a zeuio en-dro da c'hlebiañ ac'hanout... Gleb-teil e vi en-dro ar miz-mañ!




12. PESKED

N'eo ket brav! Te zo 'vont da livañ gevier da'z kerent!

Awen Ricou




Pajenn 8




Ar skipailh

Ar gorriganed, c'hoazh... Sot int gant ar chokolad. Tout chokolad da di a zaio e puñs an avel 'benn nebeut!



Bann-treset



Titouan M.M

Keloù mat

Goude daou gringn-bev eo deuet da vezañ klañvdiourez e-barzh an ospital m'eo bet pareet ennan.

Motana Brown hi deus bet daou gringn-bev, unan da daou vloaz hag unan all da 15 vloaz.

Daou-vloaz-warn-ugent eo Motana. Daou vloaz he doa p'en deus bet he c'hringn-bev kentan. E-barzh ar gwiadoù kigennel e oa ha goude bezañ adkemeret he buhez, he c'hringn-bev oa adkroget.

Goude bezañ bevet tout se hag abalamour ivez da koantiz ar c'hlandiourezed he doa c'hoant bezañ er memes plas ha hi ha bezañ ken jentil gant ar c'houzañverien-all.

Noan C



Keleier Sport:

Krogad Badminton:

Krogad Badminton e Landeleau, ar sadorn 17 c'hwevrer er sal lies talvoud (polyvalente), straed-dall deus ar skolioù.

DOUBL PAOTR

DOUBL PLAC'H

DOUBL MESKET

penn kentañ da 9e - doubl mesket

penn kentañ 2e goude meren - doubl plac'h ha doubl paotr


> boued ha evaj enno

> 5€ dre kemer perzh


> n'eus ket a renkadur


> enskrivadur dre mail araok ar 15 a viz c'hwevrerc'h (plasoù bevezet)

Gabriel(bg)



Pajenn 9





C'HOARIOÙ

Pajenn 10


Sudoku :

	7			2			4	6
	6					8	9	
2			8			7	1	5
	8	4		9	7			
7	1						5	9
			1	3		4	8	
6	9	7			2			8
	5	8					6	
4	3			8			7	



				4			9		
				8				1	2
					1		6		
								8	
1		2	3					5	
	7	4		9		1			
		8	2		4				5
	4								
	6							3	

Gerioù kroaz Breizh








A-blaen

A-blom

2. Ar pezh e vez santet pa vez graet gourc'hemenoù dit
4. Ur fest vreizhek e-pad an noz
6. Un efed optikel brav-tre hag a c'hoarvez goude ar glav
8. E-pad Nedeleg e sklerijennont ur bern tiez

1. Gwastell lipous gant spisoù ha mel
3. Ur seurt marc'h hag a vez kavet er c'hontadennoù
5. Un tad-kozh gwisket e ruz ha laouen e vez ar vugale ouzh e welen
7. Gwez bras ha na goll ket delioù e-pad ar goañv

C'HOARIOÙ



Milendall Kadok

W	C	D	I	W	A	N	O	U	Y	R	F	K	C
R	P	R	J	D	S	H	K	A	D	O	K	Z	Y
Q	X	C	K	X	K	E	R	C	H	F	A	N	K
B	G	U	A	B	L	E	U	N	I	E	N	N	V
L	F	G	Z	R	Z	E	D	O	M	I	N	I	G
I	V	G	E	R	M	O	G	L	A	V	I	H	O
V	R	W	T	Z	A	R	Z	H	I	G	S	L	L
A	B	A	E	Y	R	T	X	F	W	N	V	V	M
J	R	S	N	P	E	U	I	Q	Y	P	J	F	A
P	E	T	N	P	D	Y	H	A	G	L	K	X	N
T	I	E	J	N	E	H	O	R	O	L	A	J	T
B	Z	L	L	N	V	N	E	X	A	G	T	D	E
X	H	L	G	E	N	V	E	R	Ñ	Y	I	C	L
D	E	R	H	J	X	D	V	E	V	F	D	G	L

Gerioù kuzet

- | | |
|---------|-----------|
| Glav | Kadok |
| Horolaj | Erc'h |
| Arzhig | Kazetenn |
| Mantell | Livaj |
| Goañv | Fank |
| Reizh | Bleunienn |
| Diwan | Gwastell |

Ar C'hwizz

Pegoulz e oa bet krouet lise

Gwened ?

- E 2020
- E 2018
- GORTOZ !? Bez e eus ul lise e Gwened ?

Pet skolaj a zo e Diwan ?

- 6
- 10
- Ket a-walc'h

Pegoulz e oa bet krouet al lise

Diwan kentañ ?

- E 1994
- E1977
- E 1500 arok JK Rowling

Pet skol a zo e Diwan ?

- 50
- 47
- Etre 5 hag 100 (n'eo ket diaes)

E pelec'h ?

- E karaez evel just !
- E burev Interspot ar Releg (perak pas ?)
- Er Releg (ar re wellañ)

Respontoù war insta !!
@_k.a.d.e.k

Pet tud a zo skoliated e Diwan ?

- 4 014 e 2024
- 5 604 e 2024
- Muioc'h eget 1 a dra sur !



Coline hag Onenn

Setu trede kazetenn ar C'hadek. Meret eo gant : Gabriel, Clément, Awen, Malou, Noan, Corentin, Coline, Onenn, Titouan, Eneour

M'ho peus mennozhioù, traoù da cheñch, c'hoant kemer perzh deuit e darempred ganeomp gant ar postel : kazetennallise@gmail.com pe war

Instagram : [_k.a.d.e.k](https://www.instagram.com/_k.a.d.e.k) Pe d'ar Merc'her noz da 6e30 er sal 25 (sal urzhiataer).